

Kalon-Dir. Le Bescond Jean-Marie (Boubriag 188 – Kurzeme e Rusia 1916)
Ma Bro (1904)

Ma Bro

Da Gab Liskildry

Breizad eh on 'vel ma zado',
Evelte 'fell din-me,
Karoud ma feiz, ma yez, ma bro,
Savetei ma ene !

Me 'gar ma Breiz hag he hoajou
Sioul ha dudiuz,
He lanneier, he feunteuniou
A hirvoud truezuz !

Me gar ma Breiz hag he rehell
Krinet ha touskanet,
Seblantoud a reont mervel,
Lazet gand ar hleñved

Lar din, ma Breiz, 'n ano Doue,
Lar din hep kavoud mez,
Mar n'eo ket hennez da zoare,
Koulz ha hini da yez ?...

O ! nann, ma Breiz, ma bro garet,
Ne hellez ket mervel,
Keit ha ma chomo al loued
War da rehell uhel !

Keit ha ma teuio ar mor don
Da grignad da rehell,
Houmañ 'vezo bepred ma zon :
Te 'vevo, Breiz-Izel !

Nann, ne varvi ket, ma mamm-vro,
Pa 'teus mibien fidel,
A lamp o halon 'n o hreizo'
O ! ma bro Breiz-Izel

Ar rehell, gwir eo, 'zo debret,
Mez war horre hepken ;
Torrit ar mên hag e welfet
Eur galon yah ha kreñv.

Evel ar rehell, ma bro Breiz
 'Zeblant mond d'ar maro,
Mez n'eo ket 'vel-se en he hreiz,
 Te a vevo, ma Bro !